

(120)

Tan-Goall
Bourg Pluvigner,
Departamant ar Morbihan, ar 1^a Ebrel 1845.

Eun digeür ar goassa zo neve c'hoarvezet,
 Hac a ra spouron en eur dont d'e glêvet :
 Ar bourg a Bluvigner, ebarc er Morbihan,
 Zo o paouez bezza distrujet gant an tãn!...
 Breizis! en peb amzer c'houi a voe damantus :
 Selaouit amãn comz eus eun droug-eür spontus.
 Seitec vloaz just a zo ar bourg a Bluvigner,
 Sciõet gant an tãn-goall, voa er brassa mizer :
 Tost da anter-cant tñ voe rentet en ludu ;
 Ar spont, an digesper a rone a bep tñ.
 Hirio, Bretonet qez, hirio eo c'hoas, allas!
 Pluvigner maleurus preiz eus eun tãn-goall bras....
 An oll zo en spouron, na glêver nemet cri :
 Pulluc'het zo eno tost da zaou-uguent tñ !!!
 Tri-uguent famill zo er brassa digesper,
 Privet eus a bep tra, en horrupla mizer.
 Lacomp hon esperanz en madelez Doue ;
 Qemer a rei true demeus e vugale :
 Tud calonec ha larc a deuyo da zouten
 Ar bobl a Bluvigner en eur c'her bras angen.
 A boan e commanças an tãn-goall e ravach,
 Ec'h eru eur bobl tud carquet oll a gourach ;
 Archerien Pluvigner hac ar re divardro,
 Pomperrien Baud, Abre, qerqent rentet eno
 Gant o fompon, a zo diredet gant hast bras ;
 Ha souden e veljot, eruet eno c'hoas
 Voltjerien demeus an navet rejimant
 Hac ar grenadourien, oll tud meurbet vaillant,
 Bêleyon ha re all. Anfin, an oll eno,
 Leun demeus a gourach, a ra enor d'o brô.
 Nep danjer, nep scuissder netra n'ampach anê

(121)

Da glasc diffram d'an tãñ qement tra a zève.
 Pepini, calonec, en deus grêt e zever
 E vit douguen sicour da dud qez Pluvigner.

Pequement e tleer en em gavout eürus
 D'ellout henvel amãñ meur a zen jenerus,
 Pere zo deut gant hast da zicour an dud qeiz.
 Enor, enor dêzo en pëvar c'horn hor Breiz!

(122)

Voltijerien vaillant an eilvet bataillon
 A voa aboe tri mis eno en garnison,
 Dindan commandamant ar c'habiten Pajet
 Hac o deus, en tãñ-goall, gant courach sicouret.
 Ze ne voe get avoalc'h d'an dud jenerus-se:
 An Autrou Comt Sant-Georch en deus roet neuze
 Ar som a zaou-c'hant franc e vit o recompanz
 Da vea labourer gant qement a vaillant;
 Mes, eürus da vea en tãñ grêt o dever,
 Ec'h ejont gant joa vras da gaout an Autrou mër,
 Hac e rojont deãñ, en quis tud jenerus,
 Ar som en e antier vit an dud maleürus.

Ar c'horut eus a Sant-Georch hac e vab voe rentet
 En bourg a Bluvigner d'ar c'henta qêlou bet,
 Hac en em laqejont, evel Bretonet vad,
 Gant hast etouez ar bobl o dasu da labourat,
 Bete teir [heur] demeus ar mintin, hep relach:
 An oll ouz o gâelet a gresqe a gourach.
 An den jenerus-se hac a guer vad calon,
 A yas d'ar presbital, hac a ro d'ar Person
 Ar som a zaou vil franc e vit ranna diouc'h-tu
 D'an dud qez maleürus voa hep boued na repu.
 Da bomperrien Abre e ro tri-ugent franc,
 Mes se n'eo get avoalc'h: d'e galon nobl e vanc
 Euy action gaer all: laqat a ra poaza
 Da victimou an tãñ euy nombr bras a vara.
 Ze n'eo get estonus: an oll zo 'ñ assurans
 E zeo e vit ar vro euy eilvet Providanz.

(123)

En creis ar maleur bras, e zeus da zepiori
 Ar blesseür eürus bras eus ar serjant Marty.
 Ar c'orporal Dartial, dreist oll a zicouras
 Dre e gourach ardant enpad nerrz an tãñ bras,
 Hac an daou voltijer, Rault ha Vidier ive:
 Estoni rent an oll; an oll o admire.

(124) Epad m'ocant o sicour, ar cheverien Pluvigner
 O deus bet o c'harzern dêvet en e antier ;
 O effejou zo bet oll ar preiz eus an tãn .
 Ar jandarmeet all, hac anfin peb-unan,
 Oll o deus disquezet en creiz eur seurt ravach
 Brasser o c'halonou hac ar c'haera courach.

Secretour a Dy-Kear, den jenerus mourobet,
 En interest an oll en deveus bet lêzet
 Da vea preiz an tãn e veblou, e zillat,
 Erit ober e oll da ellout savetat
 Ar c'hayerou civil ; ha daoust d'e oll anqen
 En deus bet ar boneur da ellout dont abenn .

Neurze hep nep dale, Autrou Prefet Goenet
 Ar som a dri vil franc en deveus digasset
 Da zicour an dud paour revinet dre an tãn,
 Da ellout digresqi an niver eus o foan .
 Gergent en deus scifet da Vinistr ar Roue,
 Da zont prest da zicour, en hano a Zoue,
 Victimou an tãn-goall demeus a Bluvigner,
 Reduet oll, allas ! d'an horrupla mizer !
 An offrançon zo bras, mes ar c'holl zo euzus .
 Sonjompr er vizer vras eus an dud maleürus .
 (125) Pemp mil soët varnuquent a dalvez an dommoch
 En deveus grêt an tãn gant e horribl ravach .

Sonjit pequen euzus e zeo ze, va brois,
 Hac penos rapari eur seurt maleur qer cris !
 Oh ! sonjit en dud qez o deveus oll collet,
 Hac en pes seurt stat trist int breman reduct .

Morbihanis, tud larc, deus a greiz ho calon,
 Dre eun offranç benac, en o affliction,
 Da rêi buay sicour d'ho preudeur maleürus,
 Brêvet gant ar vizer hac eun anqen euzus .
 Eun offranç a roer en hano a Zoue,
 A denn bepret varmomp benediction an êc .

Enor ! enor ha gloar ra vo atao rentet
 D'an oll dud jenerus o deveus bet roet
 En bourç a Bluvigner an oll zicour hellus !
 Ra vint recompanset dre vadelez Jesus !

A. L. M. Lédan .

[lire: deut]